

L. I. O. & M. I.

BEVET HOR PERSON!

KANAOUEN TUD PLABENNEK

Holl var zao, bugale Plabennek!
 Kanomp holl : Buhez hir d'hor Pastor ha d'hon Tad,
 Bennoz ha gras Doue d'hor Person kalonek, —
 Buhez hir c'hoaz ha iec'hed mad!

E'r barrez-ma an holl ' vo sentus,
 Aotrou Person, d'ho Pastor ker :
 A-dreuz he voez ni ' glev moez Jesus, —
 Biken ne ' z aimp eneb he c'her!

Var hon daoulin ni ' c'hoar holl pedi,
 Holl asamblez, mintin ha noz :
 Rag ni ' gar holl Jesus ha Mari, —
 Ni ' viro Feiz hon Tadou koz!

'Vit gelloud ren eur vuhez gristen,
 Ha nan evit ober ar c'hiz,
 Ni ' zeui' beb Sul holl d'an Offeren,
 Ha d'an Daol-Zakr eur wech ar miz!

Tud Plabennek ' gar ho beleien...
 Aotrou Person, n'o pezet neac'h :
 Koz ha iaouank, prest omp d'ho souten
 E peb amzer hag e peb leac'h!

Aotrou Person, bennigit eta
 Ho pugale doujus meurbed
 Ha bezit sonj : ar barrez gaer-ma
 A jomo d'heoc'h fidel bepred!

